



## RECIT

*Composet a neve evit explica ar maleur  
erruet tost da Baris.*

Var un ton neve.

**M**E ho suppli, Speret-Santel,  
Ha c'houi, va Mam, Guerc'hes fidel,  
Jesus, va Roue souveren,  
Da rei d'am speret sclerijen.

Desir ameus ha bolonte,  
Goude sicour digant Doue,  
Da rei da entent ep appel  
D'ar Vretonet a Vreiz-Izel.

Ar maleuriou so erruet



49. 4. 19. 170

2  
Bbars mis Qerzu tremedet,  
Er blaves pêvar-varnuguent,  
Evit rei d'an oll da entent.

En deiz varlerc'h a Nedelec,  
Deiz Gouel Sant Stephan beniguet,  
E teu an eol da bara  
Evel en devez ar c'haera.

Pa zonas uneg-heur-antêr,  
E timinue ar sclerder,  
Hac e teu un devalijen  
Epouvantabl da bep christen.

Chom a ra an amzer er guis-se  
Betec un heur goude creis-de,  
Qen a lavar an habitantet  
E voe erruet fin ar bed.

Ha pa zonas un heur antêr,  
E voe guelet abars en êr  
Ur gouabren o tigueri,  
Epouvantabl da hepini.

An eol a deu da eclipsa,  
Hac an amzer da zirolla,  
Qen a spouroun tud ha hœcted,

Ha nemb anê so perisset.

Gant eur grisill epouvantabl,  
 Hac eur c'hurunou effroyabl,  
 Hac an tourmant a voe gante  
 A ranvers eun nombr a diez.

Ar stronç demeus ar c'hurunou  
 A ziscare ar mogueriou;  
 Hac an dud a voa dindanna  
 O deus ranget coll'o buè.

Tri dour demeus ar re gaera,  
 Batisset eus an terrupla,  
 A voe pilet gant an tourmant  
 D'an douar er memes istant.

Diou lestr a linen deus ar c'he  
 A voe savet var ar pave,  
 Er guêr-mâ, hanvet Dammartin,  
 E gichen bord rivier ar Sein.

Ur plac'h o canna var al lemm,  
 Ur bern dillat en e c'hichen,  
 A voe ac'hane transportet:  
 Abaoue ne get bet guelet.

Eun den oc'h ober e garg ed,  
 Divar e gar a so savet,  
 Ep m'en deus bet gallet biscoas  
 Guelet ar fin eus e veach.

Eur dijentil a galite,  
 Pinvidic bras en e leve,  
 E etat eur mestr voiturier,  
 O transport eus a guêr da guêr.

Var an hent bras e suprenet,  
 Ha teir guech e bet anlevet :  
 En deirvet beach ma cocas,  
 E renqas mervel var ar plaç.

O heuil ar brassa maleuriou,  
 E va ar c'haëra miraclou :  
 Ceta am? en un istant  
 Erruet ur miracl patant.

Distaguet e bet e loenet,  
 Hac e voetur a so briset,  
 Hac e teuont d'o marchossi,  
 Hac int peder lèo diouti.

Erfin demeus an tol amzer,

E zeo bet sellet ar c'hayèr ;  
 Hac a so cavet dianqet  
 Eiz mil den ha nombr ha loenet.

Ep conta ar vugaligou,  
 Pa è bet deut ar c'hurunou,  
 A voa o viret o loenet,  
 A so gant eston perisset.

Tud savant carguet a brudane,  
 Habitantet a gonseqanç,  
 O deus ar grisill destumet,  
 Hac en eur valanç int poeset.

An disterra deus aneze  
 A voa un anter-liour enne,  
 Hac en darn all pemp cartouren,  
 Eul liour anter en ur guir cren.

YAN AR GUEN eus a Blouescant  
 Croc en ur bla hac anter-cant,  
 En deus distroet a c'hallec  
 An c'hopi-mâ en brezonec.

F I N.

# R E C I T

*Composet a-nive var sujet tri maleurus.*

Var ton an Uzulier.

**S**ELAOUIT, asistantet, recita un exempl  
Pehini so erruet er bla pemp varnuguent,  
Gant tri maleurus impl zo en em livret  
D'ar boesson ha d'an deboch, d'ar jeuyou  
milliguet.

En daou devez varnuguent o deus be  
pignet;

Erve an déclaration deus o c'hamaradet,  
Var ar bord a dri vil scoet ha tout o oll danve,  
Hep donet da ziscuisa nac en nos nac en de.

Eun deves e sorti'ont eus an hostaliri,  
Goude carga o c'horlou a eva ha dibri :  
Pa voa et o oll arc'hant, o deus bet o c'honje,  
Hac e qemerjont o hent en eur douet Doue.

Qement christen o e'hlêve a guemere eston,  
Hac a lare e veritent cavet punition.

**B**alamour d'ar blasfemou a deu deus o guinou,  
**I**njust hac injurius da Jesus, hon Autrou.

Pa errujont e qichen eur C'halvar biniguet,  
**E** prononsjont d'an imach, hac en crucifiet,  
**D**isqen d'an traon eus ar groas, souden ha  
prontamant,

**D**a fournissa, pa voa mestr, deze o oll arc'hart.

Mes an imach biniguet ne re qet a etat  
**O** clêvet ar proposiou deus an dud miserabl,  
**U**nan a roas dean dre valiç eun tol bas,  
**U**n all un ten pistoien yarnean a losqas.

**C**oea reont d'an douar er fin eus o zorfet,  
**H**ac hon Zalver biniguet en deveus permetet  
**D**iscar an tan eus an en-evil o funissan,  
**A**balamour d'an injur o deus rentet dean.

**G**oude rentan daou-mâ e poult hac e ludu,  
**E**guile a voe dalc'het ep fival e nep tu,  
**E**xit ma vije cavet da zont da atesti  
**P**enos e coeet ar maleur var an daou den impi.

**A**n habitantet christen a guemeras eston,  
**H**ac a gondu an den-mâ ac'hane d'ar prison.  
**C**ondaonet e d'ar maro dindan pemzec devez:  
**G**rac dean da jouissa en gloar ar barados,

Petra so cos d'armaleur er bed had'an dizurs.  
 Ni entrezomp, pec'herien, o vèza furius  
 Da rentá offanç d'on mestr ha d'en disoblja,  
 Goas eguet ar bourevien ous e grucifia.

Rac er Scritur e veler, ar re-a deu d'o len,  
 E voa dre o inoçanç e rê ar Judevien  
 D'on Zalver souffr ar maro, dre n'en anavejont  
 qet :

Pa veljont e buissanç e voent convertisset.

Qement-mâ a dle hou laqat ordinal ocupet,  
 Pa zomp var bord an danjer na vemp disparesset  
 Gant hor Mestr hac hor C'hrouer deus ar gom-  
 pagnunez

Pere a so destinet da vont d'ar barados.

An ini a ra implich gant darn eus e speret  
 Da recita exemplou etouez ar Vretonet,  
 YAN AR GUENN é e hanó, a goste Landreguer,  
 E di e pares Plouyel, var bordic ar rivier.

F I N.



E MONTROULEZ, e ti LEDAN, e rue de Yur.